

CANTIC NE'VOE'

VOAR SUJET PEVARZEC DEN A SO BET BEUET

Er memés Baq,ô vo it dar Goemon. *Sur l'air* Cantic Mission Pleubian.

Peret santel inspiret din
Ar moyeno da gomposin
Eve auons dar Vretonet,
Kur maleur a fo c'hoerveet
Ar matier a fo défolant,
Ac a laqua cals mécontant
Pevarzec Den a ouc beuet
E Henez Derh er Vazeoet
Vir dro teir heur goudé crespé
E coljont évoas ho bué
An dé divoean dimés ar bla
mil seis cant tri a daougment oa
Toitet aman Martolodet,
Mæstro Baq, a navigantez,
coz, a yaouanc, me ho supli,
Sur tout Parous ar Vin hy
A fo sur muan défoler
d'o c'herent, a d'o mig ionet,
Voe évoas beuet dom a dorn
Ebars en Baq Ervoan Dagorn.
Da voant touchet oar ar gaeoc
Ar Mæst' pini voa an Daniec
A gri, hac a lara dé oll,
Memeus on neomp di goll.
Sa, ma breudeur rem gourajomp
Hac assablés y'é pedomp,
An Dremdet facr, a Sant Ervoan
D'ho saureraat fouden ah an.
Ar Mæst' excité é c'quipsil
Da bidin, non pas da grial
Pep hini en eum sauveitez,
vel m'hello, n'eu quer a remed
Goerhés Vari Mam a bueé,
Ho per trué ous hon Iné
Goerhés Vari mam binnignet,
Hac aman éveomp ni beuet.
Nealé ar sav Dévoeserien,
Martolodet, a Troherien,
A bed Jesus, hac ar Voerhés,
D'ho recev oll er Baradoés.
O ma Doué ! ô ma Jesus !
A chui Goer'hés oll gloriuz
Bet trué, a compassion
Ni ho supli a our galon.
Pa deuas ar mor d'o frellan
Memeus amant evit ho lonquan

Neusé commanfas an dud man,
Di guinnadin, a da ourlan.
Adieu hon Tadou hon Mame
hon mignonet a tud hon bro,
Graç dimp a dah d'on em voelet
Er Barados er joaüfdet..
Dianec'h era Tregouéris
A c'hui y'é Mianhiis
E quimadomp ac é houllomp,
Ch' r pidin Doué evidomp.
Hon inerrin en iliso
A laq tar laret offerno
Evit Roué a Rouané
Pidin da recev hon iné
A voir galon é commanjont,
Da c'houl pardon, ac é lersjont,
Pardon era ma breudeur ques,
A diant an oll assablés.
Pardon, ma Doué ma Chrouer
Pardon ma Jesus, ma Salvoer,
Bet, trué ous ho crouedur,
Abandon an dud dinatur..
Doué just, ac oll puiffant
Pardonet da ré fo méchant,
Ni ho phardon vés a galon
Ouzimp beet compassion.
Quement a glevo ar mæro
A scullo cals vés a daero
Cri vijé sur nep na voelijé
En Henez Derh nepa vigé.
O clever ané o crial,
en bec ar voern Guillo ar Moal
pini a offré é oll d'zavé,
Da eur vaq all oa tost dé
Na dalfoa quer dé goul sicour
Na voa eno den do recour,
Nac evit aour, nac evit mado,
Bouzar oant e ll ous ho c'h'lemo
Mæstro Baq, a Martolodet,
Peré en plas voa d'o guélet,
D'o sicour, a d'o sauveitat
Eur c'heaç vigé dirac hon Tad.
Sauvetein pevarzec den
Obliget voac'h en guit Christen
Sé a brocургé recompanfo
Dac'h er bed man, ac en Evo.



Cantique nouveau

au sujet de quatorze personnes qui ont été noyées
dans le même bateau en allant au goémon. *Sur l'air* Cantique de la Mission de Pleubian.

(Voir le n° 228 de ce catalogue.)

Cette impression du XVIII^e siècle est une simple feuille imprimée
recto verso (180×265). (Biblioth. de Quimper Armoire I, est. Et 1, n° 45).